

Gwennou (Charlez Frañsez Gwennou - Talhouarn).
(Lezadrev 1851 - Vitry-sur-Seine 1915)

Kimiad da aochou Breiz

Va lestr, displeg e oueliou, ker skañv hag eur gouelan,
A nij, war-zu ar mor braz... O ! Doue ! pebez poan !
Dilezel (evid pegeid) bourh dister va havell,
Tad, mamm, breur, c'hoar, mignoned ha va bro Breiz-Izel.

An heol a ziskenn du-hont, a-dreñv d'ar hoajou braz
Ar vrumenn en em astenn war ar gwagennou glaz,
Ne glevan ken ho kimiad, kerent muia-karet,
Mez m'ho kwel c'hoaz war an aod gand ar glahar mantret.

Bremaig c'hoaz e kleven kloh chapel Sant-Eflamm
O tiñsa an añjelus hag e welen va mamm,
War eur harreg en he sav, o pedi Mamm Doue
Da ziwall he hrouadur, d'hen sturia noz ha de'.

« Mirit », emezi, « mirit ma mabig, o ! Gwerhez !
Ar mor a zo gwall-dreitour hag a lonk aliez
En e wagennou spontuz bugale Breiz-Izel.
M'ho ped, Mamm drugarezuz, diwallit ma bugel ! »

Ma zad, e dog en e zorn hag e zellou troet
Da glask va lestr, a lavar : « Evel-se ra vo greet !
Ma tistro c'hoaz Ivonig d'ar gêr, Itron Vari,
Ez aim, da zeiz ho pardon, d'ho kweled en ho ti. »

« Mond a rim da bardon braz chapel ar Goz-Iliz¹
Ha d'ober an dro dezi e prenim eur gouriz
Greet gand ar hoar ar gwenna... Ouspenn en hoh enor,
E rim kana en overn, rouanez an Arvor ! »

E-keit-se, war ar mor braz, va lestr a bij bepred,
Du-hont, a-dro d'ar hoajou, an heol a zo kuzet,
An hekleo ne gas ken din mouez va mamm ha va zad :
Kalz re bell emaint bremañ, n'o gwelan mui ervad.

Tammig ha tamm, en dremmwel e welan o skeudou
O teuzi evel moged ha setu an daerou
O sevel d'am daoulagad, fonnuz ha c'hwerv meurbed...
Na kriz eo an disparti ! Mez kalon pa'z eo red !

Deom, en avañtur Doue, d'al leh ma vin galvet,
Ha greom e peb amzer ar pezh a zo dleet !
Marteze, kent an distro, am-bo bet an eurvad
Da hounid ar Groaz enor d'he has d'am mamm, d'am zad.

¹ chapel ar Goz-Iliz : notenn gand an oberour : e parrez Planiel, leh pirhirinaj brudet ha pleustret gand an dud a vor.

Da vihanna, mar gallan, ha gand skoaz an Neñvou,
Birviken eun enebour ne welo va zeuliou...
Mond war o hil, on tadou biskoaz ne zeskjont se,
Ha, pa ve red din mervel, me a ray evelte !

(Bet gand Gwennou priz kenta ar saver soniou).